

KIS-468 – Gl. **absolu**

(GE – 12 11 94 – 16 07 96)

Orin an termen gallek zo La. *absolve*(re "distagañ, dieren ; dishualañ, dilaoskiñ ; dizleañ ; didamall ; disoc'h, pengenniñ ; peurober" hag a-zibar La. *abso(lu#tus* "distaget ; disoc'het, pengennet ; klok, keflouer ; klok drezañ e-unan ; (verb) hep renadenn, (adanv) arveret e-unan (hep pennanv)").

Gwazhenn steriegezh an termenoù zo bet : "distagañ" Ø "echuiñ" Ø "peurober" Ø "bezañ klok" Ø "dioueriñ nep dalc'h". Merkomp bezañs ar bir kentañ er Br. *distagañ*.

Merkomp ivez diwar vont e talvez ar verb pennrann *solve*(re "dishualañ, emzizleañ, kefleuniañ" ha "dispenn, freuzañ, gwastañ", anadenn c'hoarvezet ivez er predenegoù gant hBr. *madau* "koll, gwast", Br. *mazaouiñ* (GEAK. p. 93), Kb. *maddau* "dizleañ, digareziñ, absolviñ").

Menegomp ouzhpenn kevatal henhellazek La. *abso(lu#tus* : *aujtotelhv~* "a zo e finvez ennañ e-unan ; emspirus, emvastus ; dizalc'h").

Ster Gl. *absolu*, o virout roudoù eus ar c'heal "peurc'hraet", eo "kuit a bep dalc'h, andiazalc'h". Da gentañ e raimp un trosell war generadurioù an termen gallek hag en ur ser ur renabl eus ar c'hevatalioù brezhonek arveret betek-henn ; en un eil lankad e klaskimp klokaat ar re-mañ.

KEMERADURIOU Gl. *ABSOLU* — DISKOULMOU BREZHONEK KENT

1. – ER BOELLONIEZH

a) "Sellet ennañ e-unan hep dave da netra all", Br. **dizave** ; sk. : DEN zo un termen kuit a zave, **dizave** (Gl. *absolu*). TAD zo un termen *daveek* (Gl. *relatif*, sl. KIS-374, La-09, p. 244).

b) "Nad emañ e dalc'h amplegad ebet", Br. **diamplegadel, dreistamplegadel** (GEAK. p. 107), **diamplegad** (GSTL. ¶1992) dezho ivez da gevatal Gl. *inconditionnel*.

2. – ER JEDONIEZH

Un niver a lavarer *daveel* (Gl. *relatif*) pa vez ragaroueziet gant + pe – (niver muiel, niver leiel). Gwerzh **dizave** (Gl. valeur *absolue*) un niver n'emañ ket e dalc'h e ragarouez.

3. – ER SKIANTOU

a) "Dewerzhet e-maez nep dave tidek", Br. **dizave** ; sk. : gwrezverk **dizave** (Gl. température *absolue*), eleze dewerzhet adalek ar gwrezverk izelañ gallus anvet mann **dizave** (Gl. zéro *absolu*).

b) Arveret e vez ivez Gl. *absolu* er Skiantoù gant kemeradurioù laosk, da skouer pa reer anv a "alcohol *absolu*" da arouezañ an etanol *peurbur*. Nes eo seurt arver d'ar prezeg boutin pa ra gant : "nécessité *absolue*", "confiance *absolue*" h.a. da verkañ an derez uhelañ eus un doare.

4. – ER C'HRADEG

a) "Hep kevaotadur geriet" ; sk. : Paol EN DOA DEBRET E LEIN a yeas da vale (islavarenn *stag* , Gl. proposition *relative*). Paol, DEBRET GANTAÑ E LEIN, a yeas da vale (**lezgerienn**, Gl. apposition *pe* locution en position *absolue*, sl. SADED, Yad-9, p.14).

b) Kemeradurioù gramadegel all Gl. *absolu* : "furm distaget diouzh ar gendestenn" (Gl. forme *absolue*) ; "savadur distag ent gramadegel diouzh ar peb all eus ar frazenn" (Gl. construction *absolue*, da seurtadoù dezhi : Gl. ablatif *absolu*, génitif *absolu*, h.a.) n'int ket bet arveret e brezhoneg betek henn pa ouzon. Ur c'herienn all : Gl. superlatif *absolu* zo kenedc'heriet dre Br. **dreistrez**.

5. – ER POLITIKEREZH

a) "(A-zivout ur) veli na vez bevennadur gwirel ebet dezhi" (*Emsav* 44, p. 252), Br. **diharzveli** aa. & b. (Gl. *absolu*, pouvoir *absolu*).

b) "(A-zivout ar muianiver en ur vouezhiadeg) par d'an hanter eus ar mouezhioù mui unan", Br. **dreistel** ; kevenebañ a reer ar muianiver **dreistel** (Gl. majorité *absolue*) ouzh ar muianiver *keñverel* (Gl. majorité *relative*), piaouet gant an emstriver en deus muioc'h a vouezhioù eget pep hini eus ar re all (*Emsav* 29, p. 151).

6. – ER BREDEROURIEZH

Kemeradurioù e-leizh zo d'ar ger er Voudoniezh hag en Drabedoniezh, o teverañ a nes pe a bell diouzh ur ster teologek : n'emañ Doue e dalc'h netra na ve ket eñ, ennañ emañ poell e vout. Ardaolet eo bet an adanv La. *absolutus*, Gl. *absolu*, Al. *absolut*, Sz. *absolute* ouzh ergorennoù diseurt : ar Gwir, ar C'haer, ar Mad, ar

Spered, ar Boud, an Dra, h.a. ; evel pennanv eo bet lakaet da skritell war eorizhoù ha war Doue e-unan da gentañ ; DESCARTES a anve “*l'absolu de la question*” ar bennaenn eeun a zinaou diouti pennaennoù all. Anaout a reer an diskoulmoù kinniget gant VALLEE : **groñs, peurc'hroñs, holl-, peur-, klok-**, lod anezho adkemeret gant Maodez GLANNDOUR en e *Geriaoueg a Brederouriezh* diembann : “*ABSOLU subst. être absolu : Peurvoud m. ; sans dépendance : an Diharz ; le bien absolu : ar Peurvad ; d'une façon générale employer le préfixe peur- pour l'affirmation ; adjectif peurvouedl ; diharz ; peurvad*”.

KINNIGADENNOU BREZHONEK KLOKAAT

An aters a lakaan eo : hag an termennoù arveret e brezhoneg a-dal da Gl. *absolu* a spir evit pep kemeradur ? Moarvat e c'haller ober gant **dizave** en amgant ar Boelloniezh, ar Jedoniezh hag ar Skiantoù, eleze pa studier *daveadurioù* ; adalek ma pleder gant *anienoù* (sl. KIS-093, La-05, pp. 69-70), eleze er Brederouriezh, en Deologiezh, ne oufe ket dereout un deverad diwar Br. *dave-*.

Soñjet 'm eus e deveradoù diwar Br. *-len-*. Arveret eo bet ar stirann-mañ e meur a ziskiblezh endeo :

~ er Gimiezh, da verkañ ez a un aezhenn da gediañ ouzh ur sonnenn pe ul liñvenn : Br. *lenañ* (Gl. *se fixer*, sl. SADED, Kim-5, p. 2) ; da verkañ gwered ur sonnenn pe ul liñvenn oc'h azderc'hel un aezhenn dre gediañ outi : Br. *delenañ* (Gl. *absorber*, sl. SADED, id., p. 8) ;

~ er Boelloniezh, da verkañ keñverioù diazalc'h savelek : Br. *lenad, amlenad, dianlenad, raklenad, trelenad, keflenad* (sl. KIS-087, La-05, pp. 56-59) ; da verkañ ur perzh a anien : Br. *enlenat* (Gl. *inhérent*, sl. KIS-093, id., p. 70) ;

~ er Gorfadurezh, da verkañ eren un organ ouzh unan all : Br. *enlenañ* (Gl. *insertion*, Sl. *Preder* 112-113, 115-116, 125-126 *passim* ; 147, p. 38)

~ er Vezekniezh, da verkañ stagadur surjaniel ur parzh organ ouzh unan all : Br. *anlenañ* (Gl. *fixation, pexie*, sl. KIS-275, La-09, p. 250) ;

~ er Vredoniezh, da verkañ an ezvezañs a liamm meizadus etre komzoù, realennoù : Br. *dislen* (Gl. *incohérence*, sl. GBLF. ¶ 587) ;

~ er Stlenneg, da verkañ al liamm mezoniel bloc'hel etre parzhioù un hollad, ur stlennvon, h.a. : Br. *kevanlen* (Gl. *cohérence*, sl. GSTL. ¶ 730).

Durc'hadur ster ar stirann *-len-* zo enta "liamm", "diazalc'h", "keñver etre". Ouzhpenn se e vez arveret e domanioù ken diseurt ma ne chom warnañ keal eus un debarzhadur dibarek evel ma c'hoarvez gant *-dave-*.

Ar ster da zec'heriañ zo dres : "kuit a bep keñver, dezhañ diazalc'h ebet, dreist pep sujidigezh poellel, kemezel, arc'hwelel pe alvezel" : Br. **tralen-** a hañval dereout. Diwarnañ e ve luniet : **tralen**, **tralenat** (**tralenel**, **tralenek**) aa. ; **tralen**, **tralenad** g., h.a. ; **tralened** b. (Gl. *absoluité*, Al. *Absolutheit*, Sz. *absoluteness*).

Ledan e ve maezienn arver Br. **tralen-**, keverdal pe dost da hini Gl. *absolu-*, eleze oc'h engronnañ erdal Br. **dizave-** hag o tont da genster pe da anv genad dezhañ.

Un nemedenn evelkent : er C'hramadeg, ac'hoel evit a sell al *lezgerienn*, e ve gwell ober gant **diskevaot** : Br. gerienn **diskevaot**, **diskevaotenn** (Gl. locution en position *absolue*, apposition).